


## EXPLICATION

## DEUS A VIZERRIO PARIS

## ENN PAD HE SIEG

## LAQUET ENN RIM GANT IANN AR MINOUS



## Voar don Trahison Bazeine.

Tristan queloen ez eo homan,  
Herrie ann de, quement brudet,  
Paris, o tonet d'en em rentan,  
He deus a grenn hon glac'haret ;  
Mæs penos ouffe mui rezistan ?  
Anez creuvin gant ar famin ;  
Pell-a-zo a voa ho vartiran,  
Evit-hi pebes goall-rouin.

Pelec'h a caffac'h eur kapital,  
Ilag en defe quement zouffret ?  
N'eo quet bepret 'barz enn Portugal,  
Nann, n'ha barz en Spagn queneubent,  
En Suiz, n'ha ive c'hoas en Holand,  
Queneubent memes en Hongri,  
Biscoas, me en ansav franchamant,  
Na zouffras hinin evel-t'hi.

Curius, ma breudeur, eo clevet,  
Ebarz en peb extreme,  
Ez eo bet ar ger gaër-man rentet,  
Surtout, en-pad ar sieg-se ;  
Deus a gant-pemb-a-tregont deves,  
Ar peç ta a zo spouronnu,  
Plonjet en creis ann dristidiguez,  
Ha rentet a-grenn malhurus.

Quantan tra dezi a zo manquet,  
Ma breudeur quer, ez eo ar gaz,  
Hag en-lec'h bezan fluminet,  
Evel en guiz ar c'herrio braz,  
E couezas en n'eunn devalijen,  
Ilag en n'eun noz ann tevalan :  
O Doue ! a dristan pinijen,  
Red eo convenit quement-man

Prestic goude, dezi a vancquas,  
Ar glaon-douar, couls vel ar c'hoad,  
Quement-se, mui-ouz-mui, a gresquas  
Hec'h hirvoud hac ha c'halouad,  
Rag eur vanden vraz a vugale,  
Loget noz-a-de en he c'hreis,  
Gant ann are'h hac ar scorn a zouffre,  
Mizerrio ive c'hoas a leiz.

Ma ne dije bet da vianau,  
Ma breudeur quer, nep diennes,  
Nemert ar gaz o tont da vancquas,  
Couls vel ann danve-tan memes,  
Ec'h alje c'hoas en em gonzolin,  
Ha quemer eun tam esperans ;  
Ar bouet ive ho timinain,  
A gresq adare he zouffrans.

A-hent-all, ive, hon armeo  
Manet, queit amzer, oll hep freuz  
A ra deze quemer zoubsonnio  
Ha zellet ouzimp stard a dreuz ;  
Contant avoalc'h voa da gombatin,  
Mes dindan eur gondition :  
Ma teuje ive d'he rejoignin  
Peb mitrailleus ha peb canon.

Adalec ma clev ma zeo Chanzy  
Zouzet-a-drenv divoar ar Mans,  
Paris a gouez en he c'hagoni,  
A gommans querquent da vouelan :  
Bourbaki emei a zo collet,  
Ia, ha Federb a zo ive ;  
Chetu-hi a-grenn dizespered :  
Ha piou en he flas na vije ?

Trochu, a-hent-all, Ducrot ive,  
Couls evel ho c'honsort Vinoy,  
Ho deus groët d'ar Prusian bale,  
Evidomp-ni oll pebes joz ;  
Mar guingi n'em gad da vezan trec'het  
Eo ni hon unan a zo cauz :  
Voar du Paris pa vizemp clasquet  
A redemp-oll voar du Bro-zauz.

Chetu-hi manet ta minores,  
Ha collet ganti mamm ha tad,  
Rentet-a-grenn ive esclaves,  
O Doue ! pitoiapa stad :  
Den na zell mui outhi a drue  
Red a vo dezi perisan ;  
Pe cessin d'ann importante  
A glasq ober dei n'em rentan.

Fier, ma breudeur, deus he c'henor,  
Couls evel deus he vaillantis ;  
Ennemi c'hoas da peb deshenor,  
Couls memes vel a peb mepris,  
A prefer mill goec'h n'em gaptivan,  
N'eur faeson ar muan scrijus,  
Quentoc'h vit donet d'en em rentan :  
Oh ! penos e zeo couragus !

Privet deus ar bed a gonnaisans,  
Vel en eur brassau solitud,  
Nall pelloc'h mui rentan reverans  
D'ann disteran dimeus ann tud ;  
Dre valonio hi a renq bale  
Vit eass en provins he c'hlemmo ;  
Concluomp, ma breudeur, ac'hane  
Peguen braz eo he mizerrio.

N'en deus quet pell em boa lavaret,  
Ha breman c'hoas a lavarin,  
Pes he rent ar muan glac'haret  
Eo ar bouet ho timinain ;  
Eun dablen drist dimeus ar guernes  
Enn hi prestic ni a voelo,  
Preparomp ta lion zristridigues  
Ma tougfomp dezi oll canvo.

Deus ar choezec a vis goengolo  
B'ar chec'h-voar-n'huguent a guenver,  
Ez eo zerret ec'h-holl dorajo,  
N'he deus na boucher, na quiguer ;  
A guement en defe procuret,  
Suffis evit he c'hezomo,  
A voc'h, a zaout ive a denvet,  
Prestic deus a guic a iuno

Mar g'eo bian ar c'hic, ann huo,  
Ar bara c'hoas a so ive  
Renonsomp a gren da voengolo  
Ha lampomp da fin mis here ;  
Hag-a-hane neuse e tadfomp  
Beteg ar bemzec a guerzu  
Espas voar behin a refomp  
Breman promptamant ar revu.

Adalec ta, ma breudeur cristen,  
Ar fin demeus a vis here,  
Vel mar verquan scler voar ma listen,  
Paris, sivoas dei ! nem guese  
Voar eur poen da rencout nem brivan  
Surtout deus a guiq bouchiri  
Ha d ober, evit en em vagau,  
Dimeus a guiq quezec impli.

En pad c'hoec'h-sun ez eo bet goelet  
Ann habitantet a Paris,  
Daou vilion a dud assemler,  
Ho taava er memes suplis ;  
Ho vevan epquen deus ar c'hiq-ze  
Hep ma vije bras c'hoas peb tam,  
Rag ar boez dioutan na dougue  
Nemert epquen ann tregont-gram.

Ia en pad c'hoec'h sun a lavaran  
Red eo din en repetin,  
Ez eo bet goelet an dud paour-man  
Hep netra pelloc'h da zibrin  
Nemert tregont gram a guiq quezec,  
Na gonzan mui deus a vara,  
Me gret penos mar gonzan pezeq,  
Ma c'hoizo daehu a dosta.

Da bartian ive, ma breudeur,  
Dimeus ar bemzec a guerzu  
D'ann drivac'hvet eus a viz guenver,  
Groc'omp breman c'hoas ar rivo ;  
Hag ac'hane parfet a voelfomp,  
Hag ann eil ac'h'omp egnile,  
Bars en pes stad Paris a guesomp :  
Chaos he deus mar man en bue.

N'eo quet re eston, zivoas ! dezi,  
Rag me voel he deus succedet  
Mui-ouz mui d'ar voalen a gasti,  
D'ar mortalite, d'ar c'hlenvet ;  
Deus a vil-pemp-cant eo da pomb-mil  
Ar gont euzus-ze astennet,  
Deus ann dud-ze marvet en perill :  
Ho vezan, zivoas ! re iunet.

Gant joa me a voel c'hoas ar bara  
Ho tistreint ann dro voar he c'hiz,  
Ann termen evit gouir a dosta  
D'ann habitantet a Paris  
Da renqout a-grenn capitulin  
P'he da livran ractal-brezel ;  
En intention c'hoas da dreic'hin ;  
P'he da en em lezel da vervel.

Mæs pet sort bara e zeo heman,  
A bec'hinin a meus comzet,  
Ann dederren epquen dioutan  
A zo gant bleud guinis format ;  
Mæs a perrest neuze, ma breudeur,  
N'en d'eo netra mui nemet brean ;  
O sonjal en hevelep mizer  
A meus poan speret ha poan bens.

Gouennet ze ouz hon mobilet,  
P'en d'eo gouir e z'ingut oll distro,  
Gant-he parfetamant a cleofet  
Hac hen ez eo faos ma c'homzo ;  
Ar re-ze diouthan ha deus debret,  
Di-simul ha hep ober trouz,  
Hac en mesq brean ho deus bet cavet,  
Zivoas deze ! ive c'hoas ptouz.

Ann tarif breman deus ar meuz-ze,  
A bec'hini dac'h a comzan,  
A zo deus d'ei-c'hant gram bemde !  
Sanset 'vit peb den da vevan,  
Ha da binin c'hoas ec'h ajouter  
Eun tregont gram a guiq quezec !  
Tri-c'hant-tregont gram oll o c'honter,  
Poez c'hoec'h-a-triuguent guennec.

Chetu c'hui oll oc'h examinan  
Ar boez, coulz vel ar muzur  
Sanset da bep mobil da vevan  
Hep cad pelloc'h quen nourritur ;  
Ha mar boa goall-vian ann debrach  
Ann evach hep dont voa ive,  
Rentomp deze eta mil homach,  
Rag braz voa ho c'hourac'h, ho fe.

Ouspenn da ze ar vombardamant  
Q'ement en Paris ec'halfet,  
He deus bet c'hoas malhuruzamant  
Imanz a dier discaret,  
Laquet en tan, coulz vel en luda,  
Ar vilajen a Zant-Denis ;  
Da Saint-Clou ive ez eo achu  
He c'hoar, he c'henet, he c'hoantis.

A c'hent-all, c'hoas, calz a victimo,  
En pad ar mis, a zo bet groet  
En kei a Paris gant ar bombeho,  
Calz a dud sach a zo bed ed,  
Berroc'h calz evit ar viuten,  
Entrezec ho eternite.  
O Done ! a dristan pinije !  
Ma ve ann den a gomprensfe.

Calz all ive a zo bet blesset  
Ha laquet a gren invalid,  
A greis bean oll en ho iec'hed,  
Incapabl da glasq da c'houit ;  
Chetu dev' ar Brusianed,  
Evit zalvin ho iaeo,  
Peb tra deze a zo permettet  
Rag sent ingut hag a doug quergno.

Chetu ni breman en drivac'hvet  
Deus ar mis-se hanvet guenver,  
Coulz memes evel en naontecvet,  
Ar bajen-ze a dizesper,  
Hag en pehinin ker a Paris  
A ra, gant nerz, c'hoas eur sorti,  
Evit perdisquarguan he malis  
Oar lignennu he c'henimi.

Eur gombat dimeus ann terruplan  
Ractal Paris he deus livret,  
Mæs, allas ! renquet he deus zouzan,  
Rag bet ez eo bet repouset ;  
Forset mad ez eo d'en em rentan,  
P'he ne deus mui a rasion  
Ha da donet ractal da gontan,  
Da Vismark, daou c'hant million.

Chetu galvet eta ar chefo  
Ar muian experimentet,  
Oll n'em gav accord ho c'homzo  
Vit ma vezo capitulet ;  
Eur zotoni vras eo, emeze,  
C'hoantad trec'hin ann impossibl ;  
Dre ar c'homzo-ze, groet entreze,  
Ho defos groet ho oll bossubl.

Troc'han ar lineu a oa doutus,  
A c'hent-all, ive, evit-he,  
Abred en em gavjen malhurus,  
Rag na ellent mui eas gant-he  
Provision na magadures,  
Suffis avoalc'h evit bevan :  
Red a oa agissan gant furnez  
P'he risclan dont da berissan.

Ouspenn ho defoa oll da dreuzin  
Eun dezert deus ar spontussan,  
Lec'h ne garchen nep tam da zibrin  
No nep baanao'h bet da evan ;  
Hag ann hird-e deus ann dezert-ze,  
Gant-he oll mil goech calculet,  
Ma breudeur christen, en em gave  
Deus a-dregont leo muzuret.

Ar bouet, ouspenn, a oa goal vian,  
Rag na vane pelloc'h gant-he,  
Herveo testenioù peb-unan,  
Nemert bevans evit eiz de ;  
Pembec de ec'h ellent prolongie  
Ouz n'em discar tout ar c'hezec.  
N. trezec ar zicour gant c'hredin  
A oa poent bras de-ze redeq.

Chetu Favr, hon ministr estranjour,  
O tonet da negocian,  
Gant Bismark, hon brassan adversour,  
Eun taguer tud deus ar goassan ;  
Hag ac'hane conditiono,  
Ma breudeur, a zo bet sortiet,  
Pere evit biquen a c'harso  
Na vefomp pelloc'h amiet.

Zoudardet Paris prisonnierien,  
Ia, exceptet ar garnison,  
Crog eo ar requisitionerieu.  
Da c'houlen daou c'hant million ;  
Hennes eta ez eo ann tribud  
A teus-te, Paris, da bean,  
Bismark a gav a ra eur burzud,  
Mæs quer a gousto q'ement-man.

Cant livr eta divoar peb-unan,  
A guement a zo en Paris,  
Bismark a rei he fortu buan,  
C'hoas a debro baro guiois,  
Vel just deus ann numero quantan,  
Ma vezo c'hoas bloussoc'h he benn  
C'hoec' ar c'houillon a zantan gantan  
Poent eo dean d'ar guer n'em den.

Chetu livret ive da forteho,  
Paris, dimeus da re voel'an,  
Crog ingut deja en ez c'omono,  
Quazi e zingt prest da dennan ;  
Da zoudardet, a gren dizarmet,  
Exceptet ho officerrien,  
N'eo quet evel-hen a ve gaitet  
Gant barbaret ar gristenien.

Ha piou bennag a dezir clevet.  
Piou e zeo ar c'hompositer  
Deus ar recit-man a meus canet,  
Diraroc'h aman, ma breudeur :  
Me a responto buan dean,  
Vel ma rafen da bep hunan  
Hen deus ann heur herie da vean,  
Hanvet, dre-oll, AR MINOUS, IANN.

PROPRIÉTÉ DE L'ÉDITEUR.